

# kannadig keltia

- lizher-kelaouiñ embannet gant skourr breizh ar c'hevre keltiek

NIV. 7

DISKAR - AMZER 1981

NIV. 7

Treutik ar c'hannadig hirio ! Diw bajennad dezhañ nemetken. Forzh penaos n'eo ket ur gelaouenn a zo anezhañ, e mod ebet ! Ul lizher da gas keloù eo ha netra ken ("Lizher-kelaouiñ embannet gant ar C'hevre Keltiek" evel ma weler merket war ar bajenn gentañ). Pa vez amzer a' hen ober eo aes skrivañ lizhiri hir da gontañ meur a dra. Pa c'hoarvez gant an amzer vak mont e-biou d'ar pevarlamm avat n'eus ket tu ken da bluenniñ dousik war baper evel-se. Ar pep retañ hepken a vo kavet da lenn amañ da-heul. Niverenn 5 ar c'hannadig a oa 14 pajenn enni. An niverenn-mañ avat ne vo kavet nemetdiw bajenn enni. Se a c'hellomp prometifñ atao : nebeutoc'h a bajennoù ne vo ket en amzer-da-zont ! Muioc'h a vo marteze ... gant ma vo tu !

LIZHIRI LIZHIRI LIZHIRI LIZHIRI LIZHIRI LIZHIRI LIZHIRI LIZHIRI

DIGANT PATRICK LE BESCO (PARIZ) Kontant e vefe hor c'henvroad da anavezout tud a gustum lenn CARN e rannvro Bariz ha mont e darempred ganto. Setu e chomlec'h : Patrick Le Besco, ée, rue des Envierges, 75020 Pariz.

DIGANT T. GEORGE HUNTER (INIZI SHETLAND) Sekretour " Shetland Movement " eo an Aotrou Hunter. Tizhout un emrenerezh diabarzh evit an inizi, setu pal ar strollad-mañ. An Aotrou Hunter a blijfe dezhañ gouzout muioc'h diwar-benn Breizh. Chomlec'h : George Hunter, 4 West Sletts Park, Lerwick (Shetland) GB.

DIGANT DIARMUID O BRASLAIN (BELFAST) "N'on ket a-du gant an IRA, a skriv deomp D. O B, ha koulsourien Norziwerzhon a ra evel don : ne harpont ket an Arme Guzh ; ar brizonidi avat a vez harpet dalc'hmat ganto". Anavezout muioc'h pe-seurt strolladoù sevenadurel ha politikel a vez o stourm amañ e Breizh a blijfe dezhañ. A bep seurt titouroù en deus c'hoant da gaout. E chomlec'h : Diarmud O Braslain, 36 Fruithill Pk., Belfast II.IW.

DIGANT A. MERSER (BREST) (goude bezañ lennet e CARN 34 ur pennadig a roe da anavezout lod eus an embannadurioù brezhonek nevesañ) : "Souezed on bed o lenn e-barzh CARN e oa Didrouz eur beleg ! Tamm ebet. Abasq an hini eo, tad 5 pe c'hweh a vugale ! Hag e skriv e leoneg. "Fan" eo memez gand e rannyez !"

DIGANT UL LENNER EUS TOLOSA/TOULOUSE Ur pennad-skrid bet tennet gantañ diwar "La Dépêche de Toulouse" (8/10/81) en deus kaset deomp hor c'henvroad. Danevellañ a ra ar pennad penaos emeur o paouez reiñ lañs d'ur skol-vamm okitanek eno. Chomlec'h : "Calandreta Tolzana" 21, rue Pouvillon, 31300 Toulouse. (PGZ: 87.86.86 goude 18e).

stagadeb da gCarn niv. 35

c'hwech' bro, ur stourm !



DIGANT PAOLIG KOMBOT, SEKRETOUR MEUR "AR FALZ"

(e-giz respont d'ur  
c'helc'hlizher bet

kaset bloaz 'zo gant Skourr Breizh ar C'Hevre Keltiek. Gant dale bras ec'h embannomp lizher P. Kombot, rak war-eeun da zDulenn e oa bet kaset gantañ. S. O. respontoù P. Denez hag A. Merser e niv. 6 ar c'hannadig ivez).

"(...) Evel ma ouzoc'h moarvad, ez eus <sup>bet</sup> divizet gant tud AR FALZ pemp bloaz zo, degemer un doare-skrivañ nevez hanwet "etrerannyezhel", o terc'hel kont, ar muiañ possubl, eus an oll rannyezhoù. Siwazh! n'omp ket bet heuliet gant an oll. N'eus forzh penaos e chom tud AR FALZ digor o spered war ar gudenn-se, egis war n'eus forzh peheni ha laouen e vefemp, ewid da zont hon yezh, o weled ar Vretoned kar o yezh dont a-benn da dizhout un emglev". 31.12.80)

DIGANT E. COIN : UL LIZHER DA VINISTR AR P.T.T. Drouklacuen eo hor  
c'henvroadez abala-

mour da emzalc'h ar gouarnamant nevez e-keñver Norziwerzhon. Ul lizher he deus kaset d'an Ao. Mexandeau hag un doubl anezhañ hon eus bet.

"An Ao. Louis Mexandeau a anavezan mat, eme E. Coin. Bet oa bet ma c'hellenner istor pa oan o studiañ e "khâgne" un nebeut bloavezhioù 'zo".

"Monsieur le Ministre (...) Ce que je ne parviens pas à comprendre, c'est comment un Président socialiste peut être sensible au "charme" de la dame de fer, personnage exécré par la classe ouvrière anglaise et par les minorités raciales à cause de son incapacité à admettre les terribles conséquences de sa politique économique et sociale, de son arrogance vis-à-vis des pauvres en colère, de son conservatisme foncier et de son intransigeance bornée qui ne se manifeste pas seulement à l'égard des détenus républicains irlandais".

D' UN DE NOS LECTEURS, ERWAN PICARD (RENNES) "Je viens de faire paraître un recueil de poésies intitulé CELTE CERTITUDE. Il est en vente à mon domicile, 3 rue E. Jordan, Rennes, au prix de 20 F port compris. J'illustre ainsi ma démarche : "On dit les Bretons poètes. Mais ils ne dédaignent pas non plus les arts-plastic : voyez Versailles !"

DE MARK C. PARSONS, LOS ANGELES, USA "Etudiant américain, j'ai récemment parcouru les pays celtiques

de Grande-Bretagne pour y étudier les mouvements culturels et indépendantistes. Mais comme je ne connais ni le français ni le breton, je ne suis pas allé en Bretagne; cependant, je serais très intéressé de connaître la façon de voir des Bretons. Afin de compléter mes recherches, toutes réponses aux questions suivantes seraient pour moi du plus grand intérêt

1. Comment définiriez-vous un Celte? cf. ethnologie, culture, langue, etc.
2. Etes-vous favorable à l'indépendance de la Bretagne? A sa participation à une fédération celtique? A sa participation comme province indépendante à une Europe Unie?
3. Quelle est votre position en ce qui concerne l'Irlande du Nord?
4. Etes-vous d'accord avec la Désobéissance Civile prônée par le Plaid Cymru et le Scottish Nationalist Party?
5. Pensez-vous que les Bretons sont plus proches des Irlandais, des Gallois et des Corniques que des Normands, des Parisiens ou Provençaux?
6. Y a-t-il des circonstances dans lesquelles vous approuveriez que des Bretons emploient les mêmes méthodes que l'IRA ?
7. Pensez-vous que l'arrivée au pouvoir d'un gouvernement socialiste va marquer un tournant pour la Bretagne ?"

LES REPONSES A CE QUESTIONNAIRE SONT A ADRESSER A : MARK C. PARSONS  
Box 192 - 1600 Campus Rd - Occidental College - Los Angeles 90041 USA

EMBANNET GANT SKOURR BREIZH AR C'HEVRE KELTIEK. CHOMLEC'H AR SEKRETOUR:  
Jorj ABHERVE-GWEGEN - KERBERENES - 29260 LESNEVEN